



LIVE 1
ADALEK
3 VLOAZ

UN TAMM BIHAN EUS BREIZH



MIRDI BREIZHEK AN DEPARTAMANT
KEMPER

LEVRIG-C'HOARIOÙ



Degemer mat e Mirdi breizhek an departamant, ma anv zo **Maëlle** hag emañ evit heñchañ ac'hanout.

Gant al levrig-mañ e c'halli c'hoari hag ober anaoudegezh gant oberennoù ha traezennoù liammet ouzh Breizh.

Kavout a ri ur plankennad pegennoù evit respont da c'houlennoù zo. N'emañ ket ganit ? Goulenn anezhañ en degemer !


Un nebeud reolennoù a ranker doujañ dezho er mirdi :

- Arabat mont re dost d'an oberennoù
- Arabat touchañ d'an oberennoù
- Arabat diskouez un dra bennak gant da greion

Met er mirdi e c'hallez ivez :

- C'hoari, sellet
- Hunvreal, pourmen, distreiñ, dont en-dro
- Sevel goulennoù
- Chom hep gweladenniñ pep tra

E degemer ar Mirdi e c'haller kavout respontoù al levrig.



Sell ouzh ar frizenn-mañ, diskouez a ra dit an holl varevezhioù emañ o vont da ober anaoudegezh ganto asambles...

Ha dao en hent neuze !



OADVEZH AR METALOÙ HAG HENAMZER



- 600 000
Roudoù kentañ eus Mab-den e Penn-ar-Bed

- 2200
Krog e oa an dud da grouiñ binvioù metal. Kenderc'hel a raent ivez da implijout ar maen.

A-raok Jezuz-Krist 0 Goude Jezuz-Krist

- 800
- 52
Trec'h Kaezar en Alezia



En em staliañ a reas ar Romaned e Galia ha deskiñ a rejont d'ar C'halianed bevañ evelto.

HENAMZER


Implijet e veze pezhioù moneiz ha listri ganto dija. Dont a ra ar pavezadur e-kreiz ar sal-mañ eus kibellidioù hag a oa en un ti bras galian-ha-roman.

476
Diskar Impalaeriezh roman ar C'hornôg

Sell ouzh ar maen-sav er sal 1 ha klask petra zo kizellezet warnañ.
Kelc'h ar respont mat.



Sell mat ouzh al leur e-kreiz ar pezh.
Aozet eo gant maen gwenn, maen-glas du ha brikennoù ruz.
Klask an 3 zamm a vank ha peg ar pegennoù mat el lec'h mat.



KRENNAMZER – MAREVEZH MODERN



Graet hon eus ul lamm 1000 bloaz en a-raok ! Setu-ni e dibenn ar Grennamzer eta ! Er sal-mañ, klask ar werenn-livet amañ dindan, aozet gant gwer livet.

Sell outi ha ro he livioù dezhi en-dro pa oant aet da get !



**Klask an delwenn-mañ ?
Penaos e teskrivfes neuz he dremm ?
Kelc'h ar respont mat ha klask ober evelti !**



Laouen



Soñjus



Fachet



Ul loen zo war levr an dudenn-mañ, pehini avat ? Klask delwenn sant Yann-Vadezour, gwarezour ar vêsæerien-deñved, ha kelc'h ar respont mat.



Ur vuoc'h



un oan



ur pemoc'h



ur yar

Mat da c'houzout !

Ur sant pe ur santez zo un den ha ne ra nemet oberoù mat. Evit ar Gristenien ez eo ar sent hag ar santezed ul liamm etre Mab-den ha Doue. Evit goulenn ganto bezañ gwarezet e c'haller pediñ anezho pe kinnig profoù dezho..

MAREVEZH KEMPRED : GIZIOÙ HA KLICHEDOÙ

MAREVEZH KEMPRED

MAREVEZH KEMPRED

1789

An Dispac'h Bras

E Breizh e veze lakaet gwiskamantoù disheñvel gant an dud hervez al lec'h ma oant o chom, hervez o oad pe evit un abadenn dibar. War-dro 1850-1900 e oa bet tapet poltredoù eus ar Vretoned hag ar Bretonezed-se en o dilhad mod ar vro gant luc'hskeudennerien a-leizh.

Klask al luc'hkeudennoù amañ dindan er salioù 5 ha 6 ha laka ar pegennoù en o lec'h evit klokaat ar skeudennoù.



Evit sikour hon div dudenn d'en em wiskañ, tres ul liamm etre lodennoù disheñvel an dilhad hag al lec'h mat hag an dudenn vat.

An tog
○

Ar c'hoef
○

Gwiskamant an Aven

Gwiskamant glazik (Kemper)

Ar gorfenn
○

Ar bragoù
○

Ar vroz hag an tavañjer
○

Ar jiletenn hag ar chupenn
○



MAREVEZH KEMPRED : ARREBEURI BREIZHEK

PRIEREZH RANVROEL




1789
An Dispac'h Bras

Hiziv

Klask ar c'houfr koad-mañ ha laka ar pegennoù, dezhañ da vezañ klok.



Klask an traezennoù pri-poazh-mañ ha laka ar pennigoù, dezho da vezañ klok.



Klask ar pezh arrebeuri breizhek-mañ. Amañ e veze pep a hini gant an holl dud 100 vloaz zo c'hoazh ! Met da betra e talvez e eta ?

Kelc'h ar respont mat !



En em walc'hiñ



Debriñ



Kousket

War an draezenn-se ez eus taolennet sonerien ha dañserien ganto gwiskamantoù giz Breizh. Sell mat ouzh ar plad ha gra evel unan eus an tudennoù, pe c'hoari ar senenn penn-da-benn. 😊



Amañ, tres an dra zo plijet
ar muiañ dit er mirdi !



Heuilhit ac'hanomp ha kendivizit war ho skiant-prenet
war ar rouedadoù :

 [musee.departemental.breton](https://www.facebook.com/musee.departemental.breton)

 [musee.breton](https://www.instagram.com/musee.breton)



Moullerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed
© Empennet gant : Mirdi breizhek an departamant 2023
Kaset da benn gant : Traductiongrafik
Imprimerie du Conseil départemental du Finistère